



CHANSON AL LEVITEN.

Var un ton distinguet.

An trivac'h eus ar mis-mâ e meus occasion
Da occupi va speret da gomposi ur son :
Unan benac a c'hoerzo o clêvet anezi ;
Deus eur c'hostez all m'em bo marteze sachiri.

Ar sujet eus va chanson eo an dallediguez
A so erru guel gommun etoués ar merc'het qèz ;
D'ar gloar ha d'ar vanite int so en em livret,
Envel cracq demeselet e zint erru guisqet.

Dre ze-ta, potret yaouanq, pa heet da vale
Evit guelet ho mestrez, m'o havertis a se ,
Da visqa eul Liviten pa héet d'o guelet ,
Car potret o mestrennou na nint tam respectet.

— 2 —

Mar gariet en o si guisqet prop gant mestréñ,
 C'houi a vo diguemeret vel un distoladen;
 Ha ma chommit da goania, patates ô pezo,
 Defot da gaout liviten, guisqet evel un otro.

Ma herru unan var varc'h, ul liviten gantàñ,
 Ar plac'h yaouanc deus ar sal velo aneàñ:
 Dont a rîi d'e diguemer gant cals eus a respect,
 Dre m'en deus eul liviten e vesò régalet.

Ar plac'h yaouanc a laro d'ar mevel eus an ti :
 Leqet prim marc'h an Autrou ebars er marchossi,
 Ha qesset e valisen bars er gambr uélàñ :
 Feanos e momp an enor d'e gavet da goaniàñ.

Qement a vo bars en ti deus a servigerien
 Vo e prepari e goan da bot e liviten.
 Darn a laso ponsinet, a darn all perdrien.
 Guelet peguen brao e se cavet eul liviten !

Guelet a ret, tud yaouanc, gant tout oc'h oll voyen
 Na noc'h estimet netra ma no heus liviten.
 Chanch a gustum a vo ret. Me a ro dêc'h ali
 Evit bea respectet gant ar merc'het a di.

Guelet o c'heus sclêramant nac a zispign a ve,
 Pa erru pot liviten en o si da vale :
 Ponsinet, perdrierien, güin côs, en eur guir ber,
 Eus a bep seurt liqueuriou, bonboniou vit dessert.

Pa ve pot e liviten partiet en e dro ,

— 5 —

Bremàn var ar bansion economi a vo :
 Unan benac a santo deus an dispign so bet,
 Eur bansion difripon , patates vo bep pret.

Eur rumach all a so c'hoas a zoug livitennou ,
 O deus cals education a nebeut a vadou ,
 A voar parlant dre brincip , cals a sqient gant se ,
 Ma parvenont da gavet merc'het o deus leve.

Bremàn en deus an desir da gaout eur garg benac
 A Noter , pe a Avocat , a so etajou mad.
 Laret a ra d'e bried ebars en comzou bêr :
 Red e vo guersa levé evit caout carg un Noter.

E bried a lar deàn : contant òn deus a sé ;
 Me ro déch' h otorite da verza va leve.
 Pa po ar garg a Noter , me vo neuse Itron ,
 Hac a vezò respectet gant an oll haoton.

Güel eo ganén angaji an anter va mado ,
 Evit caout un turier douar gant e oll mestrennou .
 Bremàn ni vo everus , a vevo disourci ,
 Hac arc'hant bras a gueo bemdé bars en hon ti.

Bremàn pot e liviten , gant e garg a Noter ,
 Au num livras d'au deboch na voe qet pell amzer :
 Beunde e mân o versân leveou an Itron ;
 Ma sint rentet malurus , nac ne qet hep rôson.

An Itron guèz a griot bremañ a boues e sen :
 Mc so a gren revinet gant pot e liviten :

— 4 —

Mepriset a voa ganén guechall pot e vestren ;
Deut eo aben gant e arhant da brena va moyen.

Me o ped, merc'bet yaouanc , da guemer ahanon
Velt a velet da exempl d'an oll ebars er vro.
C'hoant bras e moa da vea guisqet bars en roben ;
Eur hars a vo din bremàn cavet cotillonen.

Va friet livitennec allo bremàn monet
Da honnit et dam barra dar parcq da labouret ,
A dispen e liviten a gaffent ve mad hoas ,
Da ober un tamim brago d'e vuguel so en noas.

F I N.

